

## Raktres Kant a gan 2019

Ronan Guébléz / Marsel Gwillous

### D'hont d'ar foar a Blijedi (ton berr Fañch plin)

(dielfennet gant Louis-Jacques Suignard)

D'hont d'ar voer a Blijedi ha me 'm oe goullet koñje  
'Vel a ra peb bugel mat, kement c'ha da vale  
(Marsel : Evel ra peb bugel mat, ha kement c'ha da vale)

Gant ma mamm baour ha ma zad koñje ma goulennet  
(Marsel : Digant ma mamm baour ha ma zad koñje moa goulennet)  
'Vit ober un antretien gant ma muiañ karet  
(Marsel : Evit ober antretien na gant ma muiañ karet)

War an hent a Blijedi a me am oe rankontret  
Nag un den kozh añsian din-me 'd oe lavaret

Na p'e ket graet antretien gant ur serten merc'h yaouank  
Pa p'e goeret evel don doe re he zantimant  
(Marsel : Pe t'a goeret evel don doe re he zantimant)

M'eus he klevet i laret nag un neubeut propojoù  
Me zo hond da gonto dac'h ne larin ket ur ger gaou  
(Marsel : Me a 'ya da gonto doc'h o larin ket ur ger gaou)

Penaos e divoe evidac'h dister a zantimant  
(Marsel : Na penaos en doa 'vidoc'h a dister a zantimant)  
(Na) Med 'vit tremen an amzer dre ma oac'h ken galant

Boñsoar dac'h c'hwi plac'h yaouank (na) p'ho kavan o fale  
(Marsel : Boñjour dac'h c'hwi plac'h yaouank (ha) p'ho kavan o fale)  
Neus ket c'hoazh un hanter eur am eus klevet ho toere

Na penaos ho p'oe evidon (na) dister a zantimant  
Med 'vit tremen an amzer dre ma oan ken galant

Ba ma jardin den yaouank (a) n'eus ket med ur boked  
Hag a zo bet euneet doc'h he a' p'o pa gariet

Ha ma da d'ar gwall deodoù da lakaat hom separiñ  
Gant daeroù ma daoulagad me deui d'en aroziñ  
(Marsel : Gant daeroù ma dioulagad me deui d'en aroziñ)

Ar gwall deodoù dre ar vro zo gwasoc'h 'vit ar vosenn  
Kemend lec'h a dremenaint (nag) a lakaint an anken

Memez tre ar priejoù, '(e)tre ar breur hag ar c'hoar  
Memez 'tousk ar vignoned a lakaint ar glac'har  
(Marsel : Memez tre ar vignoned a lakaint ar glac'har)

## **En allant à la foire de Plésidy**

(Transcription et traduction littérale de Louis-Jacques Suignard)

En allant la foire de Plésidy , J'avais demandé congé  
Comme le fait chaque bon enfant qui veut se promener

A ma pauvre mère et à mon père j'avais demandé congé  
Pour faire un entretien avec ma bien aimée

Sur la route de Plésidy j'avais rencontré  
Un très vieil homme qui me dit

Vous n'auriez pas fait d'entretien avec une certaine jeune fille  
Si vous aviez connu comme moi la teneur de son sentiment

Je l'ai entendu dire quelques propos  
Je vais vous raconter, je ne dirai pas un mot de mensonge

Comment elle aurait pour vous un sentiment insignifiant  
Mais pour (que vous) lui (fassiez) passer le temps puisque vous êtes si galant

Bonsoir (bonjour) à vous jeune fille puisque je vous trouve à marcher  
Il n'y a pas encore une demi-heure que j'entendais parler de vous

Comment vous auriez pour moi un moindre sentiment  
Mais pour (que je) vous (fasse) passer le temps puisque je suis si galant

Dans mon jardin jeune homme il n'y a qu'un bouquet  
Qui est entretenu pour vous, vous l'aurez quand vous voudrez

Et si les mauvaises langues viennent à nous séparer  
Je viendrai l'arroser avec les larmes de mes yeux

Les mauvaises langues par le pays sont pire que la peste  
Partout où elles passent elle sèment l'angoisse

Même entre les époux, entre le frère et la sœur  
Même entre les amis elle sèment le chagrin.